

- 113 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

128. TREDREZ

( follennoù 109-113 )

Eur plac'h iaouank deus a Leon  
 e vond d'ar Ieodet d'ar pardon  
 Pa voe e vond gant an ent bras  
 Markis Tredrez a rankontras.

—  
 - Plac'hik iaouank, din levirit  
 Dre ma teuit a ma hid.  
 - Eus a di va zad eo a teuan  
 D'ar pardon d'ar ieodet eo e zan,

—  
 Da goves a da gommunia  
 Da honid an indulgençou mar gallan.

—  
 - Plac'hik iaouank, din levirit  
 A no c'heus kompagnunez e bed.  
 - Ma c'hompagnunez arrog zo ed  
 a me d'eva dour a zo chomet.

—  
 - Plac'hik iaouank, me o tesko  
 Da chom d'eva dour deus an n'incho

—  
 Markiz Tredre a levere :  
 De palafrinier enon neuze :  
 - Distac'hti din var dailler va marc'h  
 Lesti neuze da voëlla he goalc'h.

—  
 - evid an dra-ze ne rin ked.  
 List ar plac'h da vond d'ar Iodet.  
 ounez zo c'hoar vager dan otrou Kereunan  
 Goassa dijentil zo er bed-man

—  
 - Ne ran fors da piou e c'hoar-vager;  
 gñe-me teuio d'am maner.  
 he bisaj em deus golloet  
 Gant eur mouchouer dond-ampezet

—  
 Gant aon na vije anavezet  
 gant ar dud e vond d'ar Ieodet.

- 114 -

Ar plac'hik iaouank-man a woëlle  
e c'hompagnunez pa dremene.  
- en an' Doue, va c'hompagnunez  
bezid ouzin eun tam truez.

--

- Allas ! o sikour n'ellomp ket  
Pa ze gant Markiz Tredre e zoc'h ed.  
Ma vije gand eun all benag e vijer<sup>o</sup> ed    ° = vijec'h  
Bete ar maro or bije o sikouret.

--

Ar plac'hik iaouank man a voëlle  
er maner Tredre pa errue :  
- En an' Doue, keginerez,  
Bezid evidon advokadez.

--

Bezid evidon advokadez vad  
Da vond ganeoc'h en eur golead

--

- Noc'h ked deud da vaner Tredre  
evid-on<sup>o</sup> ganeme d'am goëlle.    ° = evit dont  
Gred o koelle er gabinet  
Gant an aotrou e zeod da gousket.

--

- Deomp dar jardin da bourmeni  
O c'hortos koan da prepari.  
Eno kemeroc'h fleur deus ar seurt o po c'hoant,  
Da viret na kemerfec'h chagrin, melankoli, na  
tourmant.

--

- Markiz Tredre ma neum c'herit  
prestit o pognard din eun neubeud  
Da troc'ha treid va bokejo  
a zo re ir o garennou.

--

- evid va fognard no pezo ked,  
va c'hontel alaouret mar keret.  
Setu-hi aze da viret.

--

er gontel alaouret e krogas,  
eur sel doc'h an en e groas  
- O Gwerc'hez glorius Vari,  
Me meus aon bras d'o hoffansin.  
ouzoc'h, gwerc'hez a houlenan  
pe me nem laz pe me ne ran.

--

Markiz Tredre o tistrei en dro  
Goëlet ar plac'h var he gino,

- 115 -

var he gino var ar ieot glaz  
en he halon ar gontel noas.

---  
Markiz Tredre a lavare  
De servicherien enon neuze ;  
- Bezit-tu sekret em andret  
Me a roïo deoc'h peb a kant skoët.

---  
A kassit ar plac'h d'ar foëneri  
Da hortoz an noz d'he anterri

---  
no doua ked o c'hond c'hoas finisset,  
an otrou Kereunan zo erruet.  
markiz Tredre a neus goulennet.

---  
- Markiz Tredre ne man ket er ger  
Rag bez en deus eun tam affer.  
- Lavar dime pelec'h eman  
pe me lakaio ta c'hoad da ruilla,  
Rag te an hini a vez gantan  
var an inchou bras o verhetan.

---  
Va c'hoar vager o c'heus kemeret  
Ag onnez dime a rentot  
- O c'hoar vager zo er foëneri  
O c'hortos aneze d'he anterri  
A markiz Tredre zo er gamb huella  
Mar o c'heus ezomp da koms outan.

---  
Oll dud an ti en deus lazet  
Nemet eur plac'h a ioa ed da terc'hed.  
En e c'hoar vager en neus kroget,  
var gein e varc'h en deus hi laked  
Di kichen ti e zad en deus hi kasset.

---  
- Debonjour a joa a lavaran  
Na va c'hoar vager pelec'h e man ?

---  
- O c'hoar vager neket dizroët  
A baoue ma e ed dar pardon d'ar ieodet.

---  
- Va c'hoar vager zo en pen o ti.  
Iakit pa gerrot e enterri.

vvvvvvvvvv

Catherine, de Coatudavel en Mespaul, femme de Pierre  
Le Borgne, Taulé, 3 mars 1851.

vvvvvvvvvv